

Ur ger a-raok

Ul lodenn vihan-tre eus istor Enez-Vriad hag an inizi tro-war-dro n'eo ken ar studiadennig-mañ. Klasket em eus tresañ, gwellikañ ma 'm eus gallet, ur vrastaolenn eus doareoù diavaez an enez hag eus hec'h istor, ha n'eo ket al levrig-mañ ur studiadenn skiantel. Me a garje bezañ aet donoc'h e studi an anvioù-lec'h, da skouer, met, ouzhpenn ma vije bet pounneraet kalz al levr, e rankan anzav ivez n'on ket barrek a-walc'h war ar c'hraf-se. Bez' ez eus a-hend-all el levr prantadoù-amzer hag a zo bet kinniget gwelloc'h ha displeget hiroc'h eget ar re all. Abalamour ma 'z on dleüs da labour tud all an hini eo, ha menegin a c'hallan amañ da skouer levr Jean-Luc ha Marion Le Pache diwar-benn an Dispac'h Bras e Briad. Arabat eta eo d'al lenner gortoz er pajennoù emañ o vont da lenn un daolenn beurglok eus istor an enezeg-se. Eürus an tamm ac'hanon ma c'hallan pourchas da Yann lenner, war an hevelep tro, dudi hag un tamm gouiziegezh bennak. Tra ken...

Porzh al Lege. Miz Here 2020

Un enezeg

Un tregont kilometr bennak en tu gwalarn da Sant-Brieg, nepell diouzh Pempoull, e-tal ur beg-douar anvet *Beg an Arc'houest*, e weler, pell er mor, degadoù ha degadoù a gerreg hag a enezennoùigoù a-strew. Dispartiet int diouzh an douar-bras gant ur ganol-vor hag a vez graet *ar Ferlas* pe *ar Ferless*¹ anezhañ. E-touesk ar chapeledad enezennoù-se (86 en holl) ez eus paot anezho hag a zo bihan ha diannezet. Menegiñ a c'haller amañ un toullad anvioù : *Ragenez-Veur*, *Roc'h-Du*, *Roc'h-Louet*, *Sec'herez*, *Voulc'h*, *ar Wiz* ha *Morbig*, er reter ; en tu ar c'huzh-heol, setu *Roc'h-Laosket*, *Krouezen*, *Liorzhoù*, *Roc'h-Melen* ha *Ragenez*. Pa seller mat diwar an douar-bras avat e weler, trolinennet spisoc'h a-us d'ar mor, teir enezenn vrasoc'h : *Benniged*, *Lavred* ha *Logodeg*. An teir enezennig-se a zo – pe a zo bet – annezet.

An holl inizi munut-se a zo evel ur c'horadenn evned en-dro d'ur yar gozh : *Enez-Vriad* eo an hini vrasañ holl. He gwelet a reer a-bell, daoust ma n'eo ket gwall uhel : *Krec'h-Simon*, pennlein an enezenn, a zo 35 metr a-us da resed ar mor. Evit mont d'an enezenn e ranker ambarkiñ e beg an Arc'houest, ha gwelloc'h eo en em erbediñ d'ur c'habiten hag a anavez mat ar biojoù, rak n'eo ket ar c'harregennoù eo a vank dre aze, ha ret eo teurel evezh pa

1 Ar Ferless : diwar ar brezhoneg « war-laez » moarvat.

vezer gant ar stur etre an Arc'houest hag Enez-Vriad, rak meur a vag he deus bet peñseet dre eno a-dreuz kerreg o fennoù rez gant an dour. An treizh, n'eus forzh penaos, ne bado ket re bell, rak n'eus nemet daou gilometr etre an douar-bras ha *Porzh-kae*², el lec'h ma touar ar bagoù a ya d'an enezenn.

2 *Porzh-Kae* : *Port Clos*, bremañ, e galleg.

Div enezenn bet staget an eil ouzh eben

Enez-Vriad a ya e gwirionez daou damm d'ober anezhi, unan er su hag egile en norzh. Staget eo bet an div enezenn-se an eil ouzh eben en XVIII^{vet} kantved gant ur pont-chaoser anvet *Pont ar Prad*, a raer anezhañ a-wechoù ivez *Pont Vauban*, abalamour ma voe lakaet sevel dre urzh ijinour brezel ar roue Loeiz XIV. An enezenn vihanañ, hini an norzh, a zo krin ha rust. Fustet e vez gant an avelioù, skoet gant ar fru, ha ne gaver warni nemet lanneier treut ha reier garv. Dibaot a diez a zo dre eno, rak el lodenn su eo e kaver an darn vrasañ eus savadurioù an enezenn : an iliz, ar vered, an ti-kêr, tiez ar bourk kozh, hag amañahont, tiez al labourerien-douar hag ar besketarien a-wechall gozh. Eno ez eo stankoc'h ha fonnusoc'h ar struzh : bez' ez eus parkeier, bez' e kresk gwez ha bleunioù a bep seurt, hag ar struzh a zo bet pinvidikaet, dreist-holl adal an XIX^{vet} kantved, gant a bep seurt spesadoù degaset eus ar broioù pell gant an dud a vor.

Daou benn pellañ an enez : Porzh-Kae, er su, ha tourtan ar Penn³, en norzh-tre, ez eus etrezo 3,5 kilometr. Hag an enezenn he deus ul ledander a 1,5 km. N'eo ket un enezenn gwall vras eta. Ur bed kloz dibar eo evelato,

3 E galleg bremañ : *Phare du Paon*.

ha danvez ur sell ennañ, rak Briad a zo bet e-pad pell ur vroig drezi hec'h-unan, hag an dud a oa o chom war an enezenn-se a oa ivez tud en o fart o-unan.

Douarouriezh ha torosennadur

Enezeg Vriad, enni 86 a enezennoùigoù, a zo e gwirionez ul lodenn eus un dolzennad c'hranitek bet ganet 615 milion a vloavezhioù a zo. An dolzennad-se a gaver ar boulc'h anezhañ e kostezioù Perroz-Gireg, un ugent kilometr bennak er c'hornôg. Evel e kornbro Porzh-Gwenn ez eo greuvaen eo a gaver war an enezenn, ur greuvaen e gristalioù ruz-sklaer. An enezenn n'eus dourredenn ebet warni, ha n'eus nemet dibaot a eienennoù. A-fed torosennadur, bez' e c'heller lavaret ez eo digompez-meurbet an enezenn : amañ-ahont, tuchennoùigoù beget gant tolzennoù roc'hellek o stummoù togn pe lemm, ha diazadoù ledan ha plaen ar strad anezho, gleborek peurvuañ, ha goloet gant ur gwiskad douar-gounid. Ar c'hrec'hiennoù ne savont ket uheloc'h eget 35 metr a-us da resed ar mor, evit ar re uhelañ anezho.

An enezenn a zo goloet ul lodenn vras anezhi gant leus, da lavaret eo ur gwiskad gouezelennek tev a-walc'h, bet stummet da-geñver marevezhioù skorn ar pevare hoalad. N'eo ket souezh eta e vefe strujus-meurbet douar an enezenn. Ken tev eo ar gwiskad-se ma ya da stummañ tornaodoù bihan e lec'hioù zo, evel, da skouer, e Porzh-Kae.

E marevezh ar Skorn-bras e oa stag Briad ouzh an

douar-bras : en tu kornôg eus an enezenn ez en em astenn
pell-pell dindan an dour aber an Trev, a oa d'ar c'houlz-se
un draoñienn hir ha don-meurbet.

Hin ha flora

Klouar-meurbet eo mikrohin an enezenn, hag er goañv eo keidenn an temperadurioù, well-wazh, war-dro 6 derez, da lavaret eo uheloç'h eget an temperadurioù o ren war barrezioù an douar-bras, evel e Plaeraneg, en tu all d'ar ganol-vor. Mard eo ken klouar an hin dre eno, a-drugarez d'ar Gulf-stream an hini eo. Panevet ma tegas ar froud veur-se ingal dour klouar en aod e vefe kalz yenoc'h an hin, rak Breizh a zo war an hevelep ledenn c'heografek hag ar C'hanada, da lavaret eo war ar 48^{vet} parallelen norzh.

Er meteier kerreizh-se, gant ar ral ma vez gwelet bodadoù rev er goañv, e kresk ken aes ha tra a bep seurt bleuñvioù hag a bep seurt plant, ha Briad a zo unan eus an nebeud lec'hioù, e hanternoz Breizh, ma weler plant kreizdouarel o kreskiñ ha spesadoù trovanel o paotaat : kavet e vez war an enezenn mimozaenned uhel, gwez-fiez, gwez-eukaliptuz, keanotez, agapant, pikolioù bodadoù hortensia ; bodoù jeranium o liv ruz, ur gaer o gwelet, a gresk stank a-hed talbennoù an tiez, hag ar gwez-palmez a ra berzh ivez. Kement-mañ a dalv' hepken evit an enezenn su avat : en norzh ne weler nemet lann, balan, brug, raden, tommheoligoù ha bleunioù bihan an aster-mor. Kalz plantennoù krap a weler ivez e su an enez : an teod-bouc'h bras hag an dragonezenn eus Madeira, al lireu eus Bro-Spagn. Evit ar pezh a sell ouzh ar gwez, ne gaver

koulz lavaret hini ebet e norzh an enezenn, war-bouez un toullad gwez-pin a-strew amañ-ahont. Er su avat e kaver onn, gwez-babu, gwez-tilh hag aloez eus ar Meksik. Padal ar gwez a zo un dra nevez war an enezenn : tre betek kreiz an XIX^{vet} kantved ne oa nemet dibaot anezho, hag an dud a ranke implijout balan, brug ha glaoued – da lavaret eo kaoc’h-saout bet lakaet da sec’hañ – d’ober tan en oaled.

Ar flora pinvidik-se, bet kresket a-rumm da rumm gant ar voraerien bet er broioù pell, he deus talvezet d’an enezenn an anv a *Enezenn ar Bleunioù*.

Miliadoù a laboused

Renabilet ez eus bet gant an evnoniourien kant-ugent spesad a laboused disheñvel e Briad ha war an inizi tro-war-dro. Amañ ivez e ranker diforc'hiñ hervez ar meteier naturel, rak ne vo ket kavet an hevelep spesadoù hervez m'en em gaver war an enez su, war hini an norzh, e diabarzh an enezenn pe el lec'hidegoù ha war traezennoù an arvor. Bez' ez eus ivez spesadoù laboused na gaver nemet war an inizi bihan pe war ar c'herreg tro-dro d'an enezenn vras.

Er su e kaver, dre vras, an holl laboused a weler o vevañ hag o paotañ war an douar-bras, en argoad : ar big, ar vran, ar gegin, ar voualc'h, an drask, ar beufig, ar pennglaouig, ar pabor, ar pintig, ar boc'hruzig... Bourrañ a reont eno abalamour m'eo stank ar struzh ha gwezennek an tachennoù. E lanneier treut an norzh avat e weler kentoc'h evned-preizh evel ar falc'hun ruz ha laboused all evel an alc'hweder, ar brean melen, pe c'hoazh ar bistrak, a blij kalz dezhañ ar bodoù lann izel. Kavet ez eus bet ivez, en diskaramzer, laboused tremeniat na vezont ket gwelet alies, evel ar puig eus Bro-Siberia, pe ar voualc'h-venez. Lec'hidegoù ha traezennoù an aod a zo rouantelezh ar morbigez, an noueliger bihan, ar sourouc'haned, ar morfedenned hag ar c'hefeleged-aod. Kavout a reont boued forzh pegement el lec'hidegoù bras d'an izelvor. Evit peurglozañ an niveridigezh hir-eston-